

Fañch PERIOU
Guirec CONNAN (Kan ha diskan)

12 - Son Marivon / *La chanson de Maryvonne* (Traditionnel)

Cette chanson fait partie du répertoire de Yann Poëns.



SON MARIVON
La chanson de Maryvonne

Selaouit 'ta Bretoned ha c'hwia glevo kanañ
Ur son 'zo bet kompozet, 'zo nevez evit ar bloaz

'Zo graet d'ur gemenerez 'oa hec'h anv Marivon
He doa tailhet rochedoù na d'an aotrou baron

Ha rochedoù lien fin, ha rochedoù lien moan,
Brodet int bet dre an dorn gant un neudenn arc'hant

Pa oa graet ar rochedoù hag ivez paket kloz
'Savas ar Varivonig da zek eur deus an noz

Pa oa ar Varivonig o vont d'o c'has d'ar gêr
'Doa rankontret ul lakez hag ur palafrigner

Deboñjour dit-te lakez, ivez palafrigner
Daoust ha c'hwia lâre din-me 'mañ ar baron er gêr

Ar baron oa en e gambrou, en e gambrou serret kloz
'C'houlennas piv oa aze d'ar c'houlz-se deus an noz

Me eo ar Varivonig, na da vestrezig koant
Deuet da zegas rochedoù, na dit baron yaouank

Ar baron 'zigor an nor, 'zigor anezhi frank
Ma teuje 'r Varivonig d'e welet en e gamb

Pa oa deuet ar Varivonig antreet 'barzh ar sal
E oa roet gwin dezhi 'barzh ur werenn gristal

Pa oa ar Varivonig 'vont gant ar viñs d'an nec'h
Ar baron sachas warni ken na strakas he brec'h

*Ecoutez Bretons et vous entendrez chanter
Une chanson composée, nouvelle de cette année*

*Elle a été faite sur une couturière nommée Maryvonne
Qui avait taillé des chemises à Monsieur le baron*

*Des chemises de toile fine, des chemises de toile fine
Brodées à la main avec du fil d'argent*

*Quand les chemises ont été faites et bien empaquetées
Maryvonne s'est levée à dix heures du soir*

*Quand Maryvonne est allée les porter à la maison
Elle a rencontré un laquais et un palefrenier*

*Bonjour à toi laquais et à toi aussi palefrenier
Est-ce que vous me diriez si le baron est chez lui*

*Le baron était dans ses chambres, bien enfermé
Il demanda qui était là à cette heure de la nuit*

*C'est moi Maryvonne, ta jolie maîtresse
Venue t'apporter des chemises, à toi jeune baron*

*Le baron ouvre la porte, l'ouvre bien grande
Pour que Maryvonne vienne le voir dans sa chambre*

*Quand Maryvonne entra dans la salle
On lui donna du vin dans un verre de cristal*

*Quand Maryvonne monta par l'escalier
Le baron l'attira si vivement que son bras craqua*

Pa oa ar Varivonig 'vont gant ar viñs d'an traoñ
Karget 'oa he godelloù a figez hag a graoñ

'Benn un tri miz goude-se, pe un tri miz hanter
Riñset oa he godelloù, karget oa he faner

Pa oa ar Varivonig 'vont d'ar gêr dreist ar wazh
Risklet 'oa he div votez, kouezhet war he revr noazh

Pa oa ar Varivonig o koutañ he zroiou
E oa ar baron fripon 'toul an nor o selaou

M'az pije ma dikriet 'vel m'az peus ma meulet
Na biken ma daoulagad, 'pije gwelet er bed

*Quand Maryvonne descendait l'escalier
Ses poches étaient pleines de figues et de noix*

*Trois mois après ou trois mois et demi
Ses poches étaient vides, son panier était plein*

*Quand Maryvonne allait à la maison par dessus le ruisseau
Ses deux chaussures glissèrent, elle tomba sur son cul nu*

*Quand Maryvonne racontait ses aventures
Le baron fripon était sur le pas de la porte à écouter*

*Si vous m'aviez critiqué, comme vous m'avez louangé
Jamais de ce monde vous n'auriez vu mes yeux*